

MALO CORRET

An Tour d'Auvergn
Ar C'henta Grenadour

Trajedien en 4 Arvest

gant **TALDIR**

Priz : 5 Gwennek

KERAEZ


EUZ A VOULEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU

1906

891.
682
TAI

Diocèse de
Quimper & Léon

Document numérisé en 2016



16
891
682
TAL
MALO CORRET

AN TOUR D'AUVERGN

Ar C'henta Grenadour

Trajedien en 4 Arvest

gant TALDIR



Priz: 5 Gwenneg

KERAEZ

EUZ A VOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU

1906

JE DÉDIE CE DRAME
au Capitaine MICHE DE MALLERAY
du 48^e Régiment d'Infanterie
A GUINGAMP

*En témoignage de commune admiration
pour nos Héros Bretons*

PRÉFACE

Il est un Héros que nous autres Bretons nous ne pouvons pas, nous ne devons pas oublier. C'est Corret de la Tour d'Auvergne.

C'est pour honorer sa glorieuse mémoire de Breton et de Patriote, que j'ai fait ce modeste drame, qui n'a qu'une prétention : celle d'être écrit avec mon cœur.

Pas plus que pour Pontkallek, cet autre drame qui contribuera pour un peu à conserver parmi nos générations le souvenir du jeune héros victime de l'intolérance française au XVIII^e siècle, je n'ai pas entendu, pour Ar C'henta Grenadour, faire œuvre de biographe. A ma fantaisie, j'ai inventé quelques personnages, et précipité les événements pour pouvoir faire entrer une si belle existence dans un si humble cadre. Le public n'en saisira que d'une façon plus claire les faits marquants de cette noble vie que j'ai tâché de mettre plus en relief ici, à la faveur de quelque entorse à l'Histoire.

JAFFRENNOU (Taldir.)

Scénario des Rôles de cette Pièce

1. — ROLES PARLANTS

Corret de la Tour d'Auvergne, Premier Grenadier.
(Actes 1, 2, 3, 4.)

Liza, sa sœur. (Actes 1, 2, 3.)

Gacégan, domestique. (Aux Actes 1, 2, 3, domestique de Liza. A l'acte 4, Grenadier français de la suite la Tour d'Auvergne.)

Dubosq, le Traître. (A l'acte 1, capitaine français. A l'acte 3, officier anglais. A l'acte 4, officier autrichien.)

Ian, Vieux Grenadier. (Actes 1, 2, 4.)

Loeiz, Vieux Grenadier. (Actes 1, 2, 4.)

Gwillou, Vieux Grenadier. (Actes 1, 2, 4.)

Kervelen, gentilhomme. (Officier français à l'acte 1, émigré et officier anglais à l'acte 3; sert dans l'armée autrichienne à l'acte 4.)

Lagardère, gentilhomme, (même dispositif.)

Un Tambour. (A la fin du 1^{er} Acte.)

Une Estafette anglaise. (Ce rôle du 3^e Acte sera rempli par le Tambour du 1^{er}.)

Une Estafette française. (Ce rôle du 4^e Acte sera rempli par le Tambour du 1^{er}.)

2. — ROLES MUETS

Un Jeune Grenadier, à l'acte 1, et à l'acte 4.

Trois soldats autrichiens, à l'acte 4.

REMARQUE :

Comme on le voit, cette pièce est très simple : quatorze personnages la rendront parfaitement.

AN TOUR D'AUVERGN

ARVEST KENTA

An teatr a ziskuezo eun dachen. An traou a dre-menn en eur c'horn deuz a Gamp Bayonne, e-lec'h e ma bodet arme ar Pireneou, er bloavez 1793. An Tour d'Auvergn an neuz 50 vloaz.

KEVREN I

MALO CORRET AN TOUR D'AUVERGN; KERVELEN;
LAGARDÈRE.

KERVELEN

Neuze, Malo Corret, n'hon heuilli ket a grenn ?

AN TOUR D'AUVERGN

Nan nan, na zervich ket. Re galed eo ma fenn.
N'eo ket kreiz an danjer e tilezin ma bro,
Eur soudard ez on bet, ha soudard me varvo.

LAGARDÈRE

Te, koulskoude, zo nobl, ha te vo tamallet.
Gwell e ve d'id silaou kuzul da vignoned.

AN TOUR D'AUVERGN

Neb a zervich e Vro gant justis ha kalon
Na vo ket tamallet gant an dud a rezon.

KERVELEN

Sell e peseurt stad trist ez eo kouezet Bro-C'hall !
Dre-holl e ma ar reuz ; hag an holl dechou fall
A zo mestr var an dud. Ar Revolution
He deuz taolet, siwaz, ar Roue er prizon,...

AN TOUR D'AUVERGN

Eur Roue er prizon, eun all a vo kavet.
Me na ran forz a-bed piou a vo dibabet.

KERVELEN

An ofiserien nobl, gwechali trec'h en arme
A zo brema laket e renk tud didalve
Ha posubl ez eo d'eoc'h gouzaon seurt treizoni ?

AN TOUR D'AUVERGN

Mab Kouer a zo kenkoulz ha Nobl da gomandi.

LAGARDÈRE

Corret an Tour d'Auvergn, souezet omp ganid.
Petra ? Gweled a rez an holl o tec'hel kuit,
Da holl vignoned koz o kuitaat an arme
Vid mond da glask justis davet gwelloc'h kontre,
Gweled a rez ar bobl o kroزال a beb tu,
An ilizou serret, ar c'hestell en ludu,
Ar Revolution o c'houarn var ar Vro
Hag o vond da checha revinou tro var zro,
Ha c'hoaz e fell ganid sikour kanaillez Franz.....

AN TOUR D'AUVERGN

Null eo d'eoc'h ho taou, rag me, ma c'houstianz
Na zerenn d'in netra. Nobl on en gwirione,
An hano Tour d'Auvergn zo bet roet d'in-me
Barz an amzer gwechall, gant an Duk a Vouillon,
Mez n'eo ket an hano 'ra kaërder ar galon.
Me zo Malo Corret. Pemp ploaz varnugent zo
Ez on o vrezelli, evit harpa ma Bro,

Ha n'am beuz aoun a-bed rag an Dispac'herien.
Me n'am beuz na leve, na madou, na moien,
N'am beuz ket a c'halloud... nemed bek eur c'hleze,
Na mestrou ken neubeud, nemed Doue a ve.

KERVELEN

Fall a rez, Tour d'Auvergn.

AN TOUR D'AUVERGN

Mad a ran, Kervelen,
O chom hep tec'hel kuit pa iud ar gorventen.
Ha pa lavarit d'in ez oc'h sonj partial,
Kervelen, me lar d'eoc'h penoz eo c'houi ra fall.
Bet ec'h omp mignoned, e keid emoc'h bet stard
Oc'h ober ho tever evel peb gwir soudard,
Mez mar 'get de Vro-Saoz da guz rag an orach
Potred, na vec'h ken dign deuz ma mignoniach.

LAGARDÈRE

Ia, me oar, Aotronez. Skler eo brema gouzout
Perag e chom Corret ! Ni eur wech eat er roud
Tour d'Auvergn hep dale en devo zur avanz...

AN TOUR D'AUVERGN

Ma anaout fall a ret, Aotronez an noblanz !
Rag mar mije bet c'hoant kaout avanz en arme
Goude ma c'hampagnou oan dign a gement-se.
Mez gwech a-bed na rin eur gammed d'hen goulenn.
O servich Franz, me fell d'in mervel kabiten.

KERVELEN ; LAGARDÈRE ; AN OFISERIEN

Neuze 'ta, Tour d'Auvergn, ni lar d'id : Kenavo !
(Eur c'hrogad dorn a reont an eil d'egile.)

AN TOUR D'AUVERGN

Kenavo, Aotronez, ha Doue d'ho miro.

(Mond a reont kuit)

KEVREN II

CORRET AN TOUR D'AUVERGN (*e hunan*)

(Bale a ra hed da hed d'an teat)

Partial a refont ! Da guzet da Vro-Saoz...
Ourgouil... lorc'h... penn da benn ! O ene a zo faoz,
Hag en o gwad na verv 'med fouge o ligne.
Petra ra d'e brazder na frankiz ar c'hontre ?
Ha c'hoaz o deuz an tal da zoned heb donjer
Da esa ma distrei divar hent an dever !
Pasianted am beuz bet d'o zilaou penn-da-benn,
Mez ma c'halon a lamm, an tan a zo em fenn ;
Gweled a ran brema ar wirionez ken skler...
An ofiserien-ze a zo great gant paper,
Ha kalonou merc'hed a drit barz en o c'hreuz.
Nan, n'eo ket kasoni ! Truez outo am beuz !

KEVREN III

AN TOUR D'AUVERGN ; DUBOSQ kabiten iaouank.

DUBOSQ (*a ra ar salud-soudard*)

Demad d'id, Tour d'Auvergn !

AN TOUR D'AUVERGN

Salud. Na piou oc'h-hu
Vit teal ahanon, a-boan ma 'zoc'h arru ?

DUBOSQ (*lorc'haus*)

Dubosq eo ma hano. Hanvet on kabiten
Barz da rujumant-te, barz ar Pevar-Ugent.
Sitoian kabiten, d'id eo ma c'henta gwel.
Ha neuze, gout a rez, brema omp holl henvel.

AN TOUR D'AUVERGN

Me ho trugareka.

DUBOSQ

C'houec'h chef euz a Bariz
Omp digaset ama e plas an noblansiz.

AN TOUR D'AUVERGN (*d'ezan e-hunan*)

Trist ec'h eo.

DUBOSQ

An noblantz pinvidik
O deuz holl dilezet arme ar Republik.
Tec'het int holl e-kuit, lezet kargou goullo,
Ha sell aze perag 'on kabiten hirio
Euz a serjant oan dec'h !

AN TOUR D'AUVERGN

Ra vo Doue meulet !
Gwell eo ze evidoc'h mar doc'h bet avanset,
Rag gwechall oa diez da Gouer boud ofiser.
M'her goar eun dra bennag.

DUBOSQ (*goapeer*)

Ha gwir ve, sitoian,
Da veza kabiten e fe bet ive poan ?
Koulskoude ec'h out koz, ha loued eo da benn.

AN TOUR D'AUVERGN

Heol hag erc'h 'deuz grizet ma fenn d'in, kabiten,
 Mez na hirvoudan ket. Eur soudard kalon vraz
 Na dle ket rei digor d'ar c'hlem na d'an allaz.
 Pephini zo merket d'ezan e blaneden,
 Mez kredi a c'hellit ma lod euz a anken
 Am beuz bet en arme, pemp ploaz varnugent zo
 Ma tougan an armou evid servich ma bro.
 Pa c'hoantaiz antren 'barz ar skol a vrezel
 Ne oan nemed eur c'houer demeuz a Vreiz-Izel.
 Ma zad a oa Corret, ha ma mam Salaün.
 Ha mar 'gon ofiser, ez on savet ma-hun.
 Pa c'hoantaiz eta mond d'ar skol da Bariz
 E oa derennet d'in ne oan ket deuz ar c'hiz,
 Ha dre ma na oan ket deuz al ligne noblanz
 Oa difennet ouzin serviji arme Franz.
 Dre c'hras eur c'horonel, eun den a wir galon
 Am frezantaz neuze d'an Duk euz a Vouillon,
 Eo am beuz gullet kaout lizer noblisite.
 Plijout a reaz gantan m'anzao deuz e ligne.
 Deuz a berz Bastarded !... Hag evelse 'chelliz
 Antren e-barz ar skol savet e-barz Pariz
 Gant Loeiz ar Bemzeged vid bugale an nobl.
 Na oamp ket kalz eno ganet euz a ouenn pobl..
 Na kredi rez brema, sitoian kabiten,
 En deuz bet Tour d'Auvergn e lod euz a anken ?
 Servijet am beuz bet 'barz ar Vouskedourien,
 Ha breman e kerzan gant ar Grenadourien.
 Goude meur a gampagn, ne n'on 'med kabiten.
 Mez n'on ket c'hoantaüs, ne c'houllan netra ken.

DUBOSQ

Bez fizianz, sitoian. Ar bobl a zo savet
 Barz er Gear a Bariz, an tan a zo kroget :

Re bell omp bet gwasket dindan ar Rouane,
 Eur c'hrosmol a gounnar a dregern er c'hontre ;
 An traou vo engalet, ha peb gwir sitoian,
 En devo hep dale ar pezh a zo d'ezan.
 Mez d'ar re a stourmo, d'ar re-ze, mil gwalleur !

AN TOUR D'AUVERGN

Trist e vo, mar be red 'n em gann etre breudeur.

DUBOSQ (*disfus*)

N'out ket republikan, Tour d'Auvergn, a weler ?

AN TOUR D'AUVERGN

Soudard hepken ez on. Ne n'on ket eur barner.
 Sur mad, c'houi a lar gwir : ezom zo chenchamant,
 Ezom a zo justis 'barz ar c'houarnamant,
 Gwell a ze mar bër holl henvel ha dishual,
 Mez na ven ken ali lakaat gwad da ruillal.

DUBOSQ

Kaër ez po dislâret, brema eo eaz gweled
 Ec'h out kentoc'h a du gant an nobl dizakret.
 N'out ket nobl, a lârez ?... Poan am beuz o kredi,
 Pa glevan ahanout o komz hep kasoni
 Deuz ar seurt tiranted a zune gwad ar paour.
 A garge o c'hestell a arc'hant hag a aour,
 Hag a oa mestr dre-holl war bep tra 'barz en Franz
 Perag n'out ket ali ve hijet an noblanz ?

AN TOUR D'AUVERGN

Dre ma n'eo ket leal renti droug evid droug,
 Nemed ar vuntrerien na dleer-kas d'ar groug.

Souezet on, Dubosq, ma komzit er seurt giz.
Petra zo bet great d'eoc'h? Lec'h kâzout noblansiz
C'houi dleche kaout d'ezo forzik anaoudegez...
Panevet m'int tec'het, oac'h serjant, ma den kez.

DUBOSQ

Diwall mad deuz da deod, pe te az po glac'har!
Me zo kemend ha te 'barz an arme, te oar?

AN TOUR D'AUVERGN (*o facha*)

Te? Petra 'teuz te great? Petra out, amprevan,
Nemed eun tam bugel?

DUBOSQ (*o tenna e gleze*)

Prest ec'h out d'en em gann?

AN TOUR D'AUVERGN

(*O'h en em lakaat en gward.*)

Allo, deuz 'ta, ma den. Diskuez d'emp da c'halloud,
Rag deuz gwelet da vin, eur c'hanfardik ec'h out.

DUBOSQ (*o sabrinz muia ma c'hall*)

Penn lorc'huz! Bastard nobl! Be sonj ar Republik
Var ma gir, a c'hallfe rei d'id ar maro-mik...

AN TOUR D'AUVERGN

Pell zo 'walc'h e souffran da gomziou a bompad:
Me ia da ziskuez d'id penoz, arog kombad,
E vije bet mad d'id mond eun tam d'ar brezel.

(*Dre eun taol kleze, e kas kleze Dubosq e-kreiz
an dachen. Egile a zo dizarmet.*)

AN TOUR D'AUVERGN

Sell aze evidout, den iaouank, eur gentel.
Brema, kuit ac'halenn. Rag na c'houlennan ket
Da laza var ar plas evel eur c'hi klanveët.

DUBOSQ *en eur bartial*

Mad ec'h eo, sitoian. Ni en em welo c'hoaz.
Da gomziou ourgouilluz a baëi ker varc'hoaz.

KEVREN IV

AN TOUR D'AUVERGN

(*A bak e gleze, hag a aze var eun taboulin
a zo eno.*)

Trist eo an amzeriou. Gwir lare Kervelen.
Prestik ar soudard simpl vo mestr d'e gabiten.

(*Eur poz a ra*)

Ar c'hoz parvenet-ze n'eo biskoaz bet en tan
Hag e c'hoanta brema ren an holl rujumant,
Hag ober al lezen d'ar vrezelidi koz.
An dra-ze na vo ket.

(*Eur poz a ra*)

Ah! soudarded en broz,
Ofiserien noblanz, kizidik ha lorc'hus,
Eur vez eo evidoc'h beza tec'het da guz.
Pa 'z eo bet gwell ganeoc'h kuitaat an armeou
Vid miret hoc'h hano, sovetei ho madou,
Ez oc'h bet poëltroned ha mestrou digalon.
Ar plas lezet ganeoc'h, eun trubard, eun heillon,
A c'hallo hi c'hemer dre urz ar Gouarnourien,
Hag ar Vro a gollo kalz a zifennerien.

Brema vo digaset tabut, rioterez,
Elec'h ne oa gwechall nemed unvaniez.

(Eur poz a ra)

Petra c'hall ober d'in Republik pe Roue ?
Me n'am beuz bet biskoaz med daou zonzj em bue :
Difenn, keid ma vin beo, Bro-C'hall barz ar brezel,
Ha pa vin arru fall, mervel en Breiz-Izel.

(Eur poz a ra)

...Breiz-Izel, kaëra bro, kaëra pobl an douar !
O ! pa zonzjan ennhï hag en he iez dispar
Pehini a zeu d'emp 'boue penn kenta ar bed,
Hag e-touez hon broiz pehini zo komzet !
He histor a zo kaër, ha red a vo d'in-me
Sevel divar he fenn eul leor bennag eun de.
Abenn brema, am beuz labouret ar sujed,
Notennou zo ganin duhont en eur c'hached,
Skrivet ganin, e-pad repoze ar vataillon,
Ha kutuillet gant poan a-hed meur a ganton...
Mar digouez d'in, eun de, achui divac'hagn
Ma buez trubuillus,... pa vo fin d'ar c'hampagn,
Me a zavo da c'hloar langach koz an Arvor
Eul leor hag a skuillo dre ar bed he enor.
Gant ma mignon Brigan, an historier brudet,
Da zevel al leor-ze dija 'on 'n em glevet.

(Eur poz a ra)

Mez dak ! E oan o vond da ankouat al lizer
Am beuz bet touchantik deuz a berz ma c'hoar ger.

(Tenna a ra eul lizer)

Goullet 'moa diganthi dond daved-on ama
Da zikour ahanon, ha da renka peb tra,
Rag kredi stard a ran e vo brezel prestik...
Ar Roue zo d'an traon... Hanvet zo Republik...
Mez ze na reio ket affer Bro-Saoz na Spagn :

An Aotrich a reio an dorn d'an Alamagn,
Hag o feder kevred e kouezint var ar Franz...

(Sevel a ra en e zao)

Mez seul vraz an danjer, seul red eo kaout vaillanz.

(Eur poz a ra)

Ia, ma c'hoarik Liza a erruo hirio.
Sethu, da vihana, peze a lavar girio
Al lizer zo ama. He-hun en Keraez
E kav an amzer hir, hag an dristidigez
A c'hallfe diverraat buez ar c'hraouadur.
Gwell e vo er Menez, kreiz an ear iac'h ha pur,
Hag an dra-ma vo d'ei eun tammik diduel.

*(Corret a dap e gorn-butun pri, eur c'horn-tan
hag eun diren. ha komans a ra da chouka eur
c'hornedad.)*

Hogen, mar be red d'in partial d'ar brezel,
Me a gaso anei da ved ma c'hamarad
Ar Brigan en Passy.

(Tana ra e gorn)

Den fur ha kalon vad
Eo ma mestr Ar Brigan. Braz e wiedegez,
Tad seiz a vugale savet mad er furnez,
Hag a zo c'houec'h anê dija 'barz an arme
O serviji o bro gant kalz a garante.
Eur famill enorabl, dign euz a beb doujanz ;
Salo ma vije bet kalz outo dre ar Franz !!!...

*(Tapout a ra eur c'hoz leor koz deuz godel e
gapoten, hag e ia kuit en eul lenn.)*

KEVREN V

(Dubosq oc'h erruout dre an tu all)

DUBOSQ *goapetis*

Corret a Gerboffret Teofilo-Malo
Hag ouspenn Tour d'Auvergn !! Sed aze pemp hano
Evid eun den hepken ! Pevar anê zo re !
Orsa 'ta, la mordieu, ha c'hoaz e lavare
Na rea ket loden demeuz ar c'hoz noblanz ?
Tremenn poent eo sklapa ar seurt-se er meaz Franz.
Evidon, me fell d'in e vo sentet ama
Diouzin-me hepken. Me zo mab Marianna
Hag ar Gouvansion he deuz ma digaset
Da surveill, da zinonz, ar re na c'houllont ket
Presta d'ar Republik lê-douet da senti :
Malo Corret, gwir eo, an neuz pleget d'ezi,
Ha n'ellin ket, foultre, hen paka dre aze,
...Me glasko eur pleg all d'hen kas deuz an arme,
Rag keit ha ma chomo hennez er rujumant
Ne gav ket d'in, mordieu, e c'honein m'arc'hant.
Me a gouezo varnan ! Birvi 'ra ma ene
Pa zonjan on dleour d'ezan deuz ar vue...
Na zouffrin ket pelloc'h eur seurt outrach ken kri.

(Sellout a ra)

Tud o tond ? Eur plac'h eo ? ... Eur gwaz samblez ganthi...
Koachomp ama...

(Mond a ra da guzet)

KEVREN VI

LIZA CORRET ; GWEGAN *he mevel*

LIZA *o c'houlenn*

Gwegan ? Erru omp tost d'ar c'hamp ?

GWEGAN

Me a gred d'in, Itron, ec'h eo ama e man.

LIZA

Duze 'barz an dremwel, e welan tantennou,
Klevout a ran ar c'horn o vouda.....

GWEGAN

Fuzulliou

A zo duhont ive ; var an taboulin-ma
C'houi a c'hallfe, Itron, eur pennad azea,
Rag skuiz oc'h a dra zur....

LIZA *goude beza azeet*

Ia, me zo skuiz maro,

Mez adnerzet e vin pa adgwelin Malo...
Ha c'hoaz, petra laran ? N'on ket sur deuz a ze.
An dud a gont penoz noblansiz an arme
A zo partiet holl, leusket ganto o bro.
Daoust ha hi o defe chêchet d'ho heul Malo ?
Na gredan ket. Ma breur n'eo ket den da guitaat,
Re e kar ar vicher. Ha koulskoude, d'am grad,
Marteze vije bet furoc'h o tibrada
Araok ma vo deuet ar Gwillotin ama.
Neuz ken kaoz dre ar Franz 'med deuz dibennerez,

Neb zo beleg pe nobl a gollo e vuez.
A beb sort treitourien zo skignet dre ar vro,
Hâ n'o deuz ken micher nemed surveill an dro
Ha diskuill an dud sioul d'ar Revolusion,
Ha var eur gir hephen o zeuler er prizon.....
Gwall fall e ia ar bed.

GWEGAN

Perag eun den a bobl
Evel ma 'zeo ho preur 'neuz bet eun hano nobl?

LIZA

Gwegan, te na 'teuz ket da varn var an dra-ze.
Red e oa bet d'am breur, 'benn antre en arme,
Goulenn eun desteni da lâret e oa nobl.
D'ar c'houlz-ze, en arme, ne oa ket tud a bobl.

GWEGAN

Ha brema zo ebarz?

LIZA

Evelse a lerer.
Adalek ar c'houlz-ma n'euz ken nemed breuder.
Gret a zo eul lezen da lâret omp henvel
Ha ne vo muia brema na perc'hen na mevel.

GWEGAN

O, ze n'eo ket posubl, Itron Liza Corret.
N'on ket vid komprenn ze. Re zimpl eo ma spered.
Evidoc'h-hu, bepred, c'houi chomo ma Itron,
Ha me vo ho mevel dre holl en peb feson!
Nan, nan, a-vad, foultre! Keid ma vin Fanch Wegan
M'ho servijo bepred.

KEVREN VII

DUBOSQ *o tispaka, hag o lavaret*

Sell pebez gwiskamant
Zo gant ar vaquez-ma. Homa, var ma meno,
A dle beza zur mad deuz koste Bro Malo
Corret an Tour d'Auvergn demeurez a Gerboffret.
Mar n'eo ket re zovach, me a ia da glevet.

(Goulenn a ra)

Itron Estranjourez, da saludi a ran.
Petra c'hall da zigas ama beteg ar c'hamp?

LIZA

Aotrou ar c'habiten, iskuzit ahanon,
N'on ket Estranjourez. A Vreiz-Izel ec'h on,
Ha deñt on da Vayonn evid gweled ma breur:
E pelec'h e c'hellfen hen gwel'd, ha da bed heur?

DUBOSQ

Piou zo breur d'id ama?

LIZA

An Tour d'Auvergn Corret,
Kabiten Grenadour.

DUBOSQ

Ha, ha! Eur c'hoar barfet
An neuz sur Ar C'horret! Mordieu! Petra laran?
Ia 'vad, eur plac'h terrubl, ha dous, var a welan:
He lagad a zo skler ha rond he brucheden:
Gwelomp hag hen raffe eur pok d'eur c'habiten.....

(Liza a gomans krial ha redek)

KEVREN VIII

DUBOSQ ; LIZA ; GWEGAN
AN TOUR D'AUVERGN (*en eur antren souden*)

AN TOUR D'AUVERGN *fuloret*

O malloz an ifern ! Petra 'wel ma lagad ?
Eur c'habiten hudur var lerc'h ma c'hoarik vad,
Distro ama, pemoc'h, dirag bek ma laonen.
Eun insult great d'am c'hoar ne bardonin biken.

(*Ar c'hlezeier a zo dispaket. Direnna a reont. A greiz-holl, e weler An Tour d'Auvergn, o vranskellat hag o koueza etre divrec'h e c'hoar Liza ha Fanch Wegan. Al lach Dubosq a red e kuit...*)

AN TOUR D'AUVERGN

Liza ! Liza ! Ma c'hoar ! Bleset 'on em c'hoste.

DUBOSQ *araok disparisa*

An taol-ma a gousto ker d'in-me marteze.

KEVREN IX

CORRET ; LIZA ; GWEGAN
PEVAR GRENADOIR (*oc'h antrenn*)

IAN, *grenadoir*

Chékon ! Petra welan ? Ar Mestr prest da vervel.
Petra zo erru ta ? Straket eo ar brezel ?

LOEIZ, *grenadoir*

Venjanz, venjanz varné ! Dao var ar boëltroned
O deuz goullet d'emp eun tad ken adoret.

GWILLOU, *grenadoir*

Venjanz !

AN TOUR D'AUVERGN

• Peoc'h, mignoned ! Ne n'on ket maro tre
Eun tam gouli a meuz, me gred, 'barz em c'hoste.

IAN

Hanvet hoc'h adversour, kabiten ar gwella,
Ha m'en digaso d'eoc'h beo pe varo ama...

AN TOUR D'AUVERGN

Neb en deuz va bleset, Doue hen anave.
C'houi, Jakez ha Gwillou, va c'hasit alême,
Ha dougit ahanon beteg ebarz ma zi
'Benn arc'hoaz e vezo iac'heet d'am gouli.

(*Gwillou hag eur Grenadoir iaouank a zamm o c'habiten, hag a ia 'meaz gantan ; war o lerc'h Liza o ouela, hag ar mevel Gwegan.*)

KEVREN X

IAN ha LOEIZ, *grenadoirien*

IAN

Eun dra estranch eo zur !

LOEIZ

Eun dra spontus ec'h ê !
Piou nije e skoet 'med eun treitour a ve ?

Ian, red eo d'emp venji bleseür eur mestr ken mad
Rag e vuntr e a zo ama 'tousez hon bagad.
Na dle ket boud erru pell ac'hann 'benn breman,
Dond a rez var e lerc'h?..

IAN

Ia zur, ec'h in d'ezan?
Na pa ve jeneral, ni en lako abof
Ha gant hon sabrinier ni zivouello e gof!

KEVREN XI

DUBOSQ o tond dre an tu all

O Doueez Raezon! Bec'h a vo var ma ler!
Mar tapont ahanon, vin krouget berr ha berr!
Marvat e ve gwell d'in dilezel an arme
Hag esat en em gaout bete Pariz duze:
Eno me vo dinec'h, ha dre ma mignoned
Me c'hallo dond a benn demeurez Malo Corret.
Me ziroudo zur 'walc'h an daou c'hrenadour-ze
Hag e vin pell ac'hann me zo sur heb dale.

(*Tec'hel a ra*)

KEVREN XII

(*Kleved a rer an taboulinou er meaz o son ar
"generale". Soudarded a erru gant o armou, ha
prestik eun tabouliner pehini a lavar :*)

AN TABOULINER

Dre urz ar jeneral Servan, ar Soudarded
A dleo beza prest arc'hoaz vintin abred

Da vond var zouar Spagn da vrezelli brema.
An emgann a vo hir; arabad ve krena.
Evid ar Republik, unan ha diloden,
E kerzo d'an emgann an holl Grenadourien.

IAN

Mez nag an Tour d'Auvergn?

AN TABOULINER

E c'houli 'zo dister
Dija eo kalz esoc'h, hag an holl a esper
A vo arc'hoaz var-zao en penn ar vâtaillon.

AR GRENADOURIEN

Bevet an Tour d'Auvergn, ar soudard a galon!

AN TABOULINER

Bevet an Tour d'Auvergn!

AR GRENADOURIEN

Bevet ar Republik!

IAN

Kanomp ar *Marseillaise* brema 'rok mond e kuit.

(*Kana ra*)

Var raok bugale vad ar vro-ma
An deiz a c'hloar zo digouezet,
Eneb d'emp ec'h eo savet brema
Banniel ru-gwad an diranted! (bis)
A glevet-hu dre an holl gontre
O iudal brezelourien kri
Pere 'zeu beteg en hon zi
Da laza hon grage, hon bugale!

D'an armou, kenvroiz! 'N em stardit tro var dro!

Kerzomp, kerzomp

O gwad dizakr a demzo an ero!

(*Mond a raint e-kuit. Ar ridoch a ziskenn.*)

Divez an Akt kenta

EIL ARVEST

An teatr a ziskuezo, evel en arvest kenta, eun dachen, pe eur c'hamp. Pa zavo al lian, tri C'hrenadour a vezo azeet var deir skabel pe var dri daboulin, ha kartou ganto en o daouarn, evit c'hoari. A gostez, o fuzuliou savellet. E kichen ar fuzulliou, en em zalc'ho Gwegan, mevel an Tour d'Auvergn.

KEVREN I

TRIGRENADOUR, GWEGAN, mevel an Tour d'Auvergn

IAN, grenadour (da Wegan)

Achanta, Gwegan goz, an danz a zo bet tom.
Mez an Enebourien, pa fachomp, a renk chom.
'N em blija rez ama, respont d'in, Gwegan goz ?

GWEGAN

Ha fe 'vat, Aotrone, gwell eo d'in ma farroz
Evid ar vuez-ma. Ama na glever ken
Med sakri ha toui, garm-iud ha klemmaden,
Bouzaret eo an den gant trouz ar fuzuliou,
N'ouzon pelec'h kluda pa groz ar c'hanoliou,
C'houez ar poultr a ro d'in poan estomok ive
Kontant 'on dond d'ar gear, me lâar ar wirione.

IAN

Allo, kamarad koz, eun tammik out spontik.

LOEIZ, *grenadour*

Gwegan, dre ma kosa, a zalc'h tostoc'h d'e gik !

(*Choarz*)

IAN

C'hoariomp ar c'hartou ! Ro peuc'h d'in gant Gwegan.

(*C'hoari a reont*)

LOEIZ

Memez tra, malloz-ru, skuiz ee'h on 'boue ar gann.

GWILLOU, *grenadour*

Panevet d'hon gwir chef, Corret ar c'hourajus,
Marteze 'mijetap bet eur finvez maleürus.

GWEGAN

Chekon 'ta, soudarded ?.. Corret zo re hardi.
Benn ar fin vo lazet araok fin ar barti.
E c'hoar Liza ha me, e-pad an emgann-ze
N'hon beuz great hep paouez. nemed pedi Doue.

IAN, *goapeüs*

N'euz Doue a-bed ken, te a glev, Gwegan koz.

GWEGAN

Geo ! Geo ! Eun Doue zo e lein ar Baradoz.

IAN

Hema koz zo diot.

(*Da Wegan*)

Mar peuz c'hoant da glevet
Penez An Tour d'Auvergn en deuz soveteet
An arme holl a-bez, silaou ar wirionez :
Ar Spagnoled a oa var griben eur menez,
Hag ac'hané réent plom d'emp ken e iude !
Heb konta c'hoaz penoz a zeou d'emp oa ive
Eur pezh kastell muret leun a enebourien
Hag a harze ouzomp da vond d'o diarbenn.
An Tour d'Auvergn, raktal ma welaz an afer
Na chomaz ket eno da varc'hata e ler.
E vantell e lakaz dustu var e vrec'h kleiz,
Hag eun hach 'n e zorn deou, e saillaz vel eur bleiz
Tresek dor ar c'hastell, eur pikol dor dero !
E vantell a viraz hon mestr deuz ar maro,
Rag enghi goude-ze oe kavet merk dek tenn,
Pere, kollet o nerz, n'échont ket d'e groc'hen.
N'eur weled e gourach, ar Vataillon dustu
Zo lampet var e roud, ha prestik ec'h erru
Dirag dor ar c'hastell, daoust d'an tennou fuzul.
Kred hardi na chomchomp ket da zalc'hen kuzul...
Vel eul leon dispont, Corret, dirag an nor
A sko a dro e vrec'h evid toulla digor,
Ha kemend e faoutaz ma saillaz eur planken
Hag a lezaz plas d'emp evid gallout tremenn,
Spagnol 'bed n'achapaz deuz etre hon daouarn,
Holl e oant toullgovet hep prosez hag heb barn.
Eur wech oa kemeret ar c'hastell-ze ganemp
Kerzet var ar menez a oa kalz esoc'h d'emp,
Hag ar viktor chomaz gant armeou ar Franz
Bennoz d'an Tour d'Auvergn, bepred leun a vaillanz.

LOEIZ

E hano vo meulet keid a vo tud er bed.
 Mez, ouspenn den hardiz ez eo Malo Corret
 Eur mestr madelezes eo vid peb Grenadour.
 Eur wech, risk e vuez, e saillaz 'barz an dour
 Evid sovetei eur soudard o veuzi.
 Eur wech all, brema zo daou viz bennag, pe dri,
 E teuaz var hon zro eur C'homisaër uhel.
 A-boan ma oa erru, hen a lâraz gervel
 Corret an Tour d'Auvergn. — « Klevet meuz, emezan,
 Meuli oc'h oberou. Goulennit 'ta breman
 Kement ho pezo c'hoant, eur grad pe eur faveur,
 Hag ar C'houarnamant a zento var an heur. »
 — « Sitoian Komisaër, eme ar C'habiten,
 Mar gout barrek awalc'h da rei d'in ma goulenn,
 Me a c'houll diganid eur re voutou nevez
 Rag ma re a zo toull dre forz kerzet bemdez.
 Kemend-all a c'houllan evid ma Soudarded,
 Netra 'bed a hend-all na fell d'in da gaouet ! »

IAN

Ar sort-se a zo tud ! Evidon me skuillfe
 Ma gwad gant plijadur vid difenn e vue.

KEVREN II

AR GRENADOURIEN; GWEGAN; AN TOUR
 D'AUVERGN; LIZA.

*(Corret a erru neuze, harpet var brec'h e c'hoar
 Liza. Feson skuis en deuz. Ar Grenadourien a zao
 a-unan hag a ra ar salud militaër. Chom a reont
 er stad-se betek ma komz an Tour d'Auvergn.)*

AN TOUR D'AUVERGN

Salud, salud, paotred. Hag ar bed, penoz 'ma ?

AN TRI SOUDARD

Ar bed, ma c'habiten, zo bepred memez tra.

AN TOUR D'AUVERGN

Memez tra ? Siwaz nan. Evidon ne vo ken
 Ar pezh eo bet gwechall.

IAN

Penoz 'ta, kabiten ?

AN TOUR D'AUVERGN

Ma bloavejou kampagn, ma c'hannou niverus
 'Deuz feazet ahanon, ha mond a ran dre ûz.
 Ma c'hoar Liza na ra nemed lavaret d'in
 Distrei da Vreiz-Izel. Hanta, distrei a rin.

IAN

Petra ? Penoz ? Distrei ? Hon dilezel aman ?
 O na refet ket ze, kabiten, a zonjan !

LOEIZ

Dilezel ac'hanomp ? Ha penoz e refomp
 Eur wech vo partiet ar rener a garomp ?
 O na bartifet ket, pe ni holl ho heuillo !

AN TOUR D'AUVERGN

Morbleu, c'houi am lakfe da chench ide en dro...

LIZA

Malo, ma breurik mad, sonj ta, chom da viken

Staget deuz an arme, o kaout bepred anken,
Hep gounid eur munut zoken da repozi !
Ha na adgweli ken da gerent na da di !

IAN

Mar tec'hit diganeomp, kourach n'hon bezo ken.

LOEIZ

Ar Spagnoled, marvat, en em gavo laouen
Pa glevint ar c'helou vo partiet Corret.

AN TOUR D'AUVERGN

Laouen ar Spagnoled ? Petra teuz lavaret...

LIZA

Chamez ket d'o zilaou, Malo. Kleo ma ali.
Evid mad da iec'hed, mall eo d'id repozi.

AN TOUR D'AUVERGN

Evid pezh a dalvez ma c'hroc'hen na ma ler
Kerkoulz eo d'in mervel er brezel vel er ger !

LIZA

Neuz ket kont deuz mervel, ma kerez ma zilaou.
Keid all zo 'boue ma zomp dispartiet hon daou
N'e ket poent d'id hirio, var diskar da gozni,
Dond d'ober eur gweled da Geraez, d'ez ti ?
Hag eun dra all ouspenn... Penoz e ri aman
Da beurskriva al leor a labourez varnan ?
Er ger e vi sioulloc'h da skriva ha da lenn.

AN TOUR D'AUVERGN

Gwir a larez, Liza. An traou a zo em fenn
A meuz c'hoant a bell zo da skriva var baper
Ma labour vo gwelloc'h pa vin sioul 'barz ar ger.
Moned a rin ganid. Varc'hoaz ni gemero
Eur vag ebarz Bayonn evid distrei d'hon bro.

(O trei var zu e zoudarded.)

Ha d'eoc'h-hu e laran kenavo, mignoned,
Gras d'emp d'en em weled en palez an Drinded.

(Poka ra d'ezo heb eil.

Mond a ra e kuit gant Liza ha Gwegan.)

KEVREN III

AR GRENADOURIEN

IAN

Partiet ! Eat eo kuit !

LOEIZ

Allaz ia. eat eo kuit !

IAN

Kollet eo an arme, Loeiz, me hen asur d'id.

GWILLOU

Na gavimp biken ken eur mestr mad eveltan.

IAN

Nan biken, birviken. Sell... Me zo klanv breman,
C'hoant gouela zo deut d'in. Ma na n'è ket eur vez !
Biskoaz na meuz gouelet, nan biskoaz, Gwillougez.
Ma mouchouer buan ! Pelec'h meuz hen laket ?
Allaz, mouchouerou, na 'meuz hini a-bed.

*(Torcha 'ra e zaoulagad
gant kil e zorn. An daou all a ouel ive.)*

LOEIZ

Eur vez eo evidomp gouela vel bugale,
Ni, soudarded savet ha kozet en arme.
Mez n'on ket vit miret. Na pa varfe ma zad
Na mefe ket, gav d'in, muioc'h a galonad.

*(An tri grenadour a aze var o zaboulinou, hag
a chom mantret eno, o bizajou ganto en o daouarn.)*

(Ar ridoch a ziskenn)

Divez an eil Arvest

TRIDE ARVEST

*An teatr a ziskuezo diabarz eur prison, pe
c'hoaz eur c'haë en Plymouth, porz-mor a Vro-
Saoz.*

KEVREN I

AN TOUR D'AUVERGN ; LIZA ; GWEGAN.

LIZA

Prizonierien ar Saoz ! Gwasa da blaneden !
Chom heb gweled hon bro marteze da viken !...

GWEGAN

Gwall gastiet ec'h omp ar wech-ma gant Doue.

AN TOUR D'AUVERGN

Na ziskourajet ket. Krouer braz peb bue
An neuz renket an traou vel m'eo dleet d'è dond.
Da varn e oberou na vezomp ket re bront.
Eul lestr Saoz 'noa gwelet hon bagik var ar mor
Hanter-hent 'tre Bayonn hag aochou an Arvor,
Hag omp bet prizoniet heb gallout 'n em zifenn.
Hon frankiz ne n'eo ket kollet da virviken.

(Trouz er meaz)

LIZA

Unan bennag a zeu etresek ar prison...

KEVREN II

AN HEVELEP RE : TRI OFISER SAOZ

AN OFISER KENTA (*goapeus*)

Salud, an Tour d'Auvergn ! N'omp ket ken en Bayonn !

AN TOUR D'AUVERGN

Dubosq !! Var ma fe dall ! Dubosq ofiser Saoz !

DUBOSQ

Vel ma welez, Corret.

AN TOUR D'AUVERGN

Treitour ! Petra zo kaoz
Ec'h euz troet da gein ha kuitaet Bro-C'hall
Evid dond da rei dorn d'hon enebourien fall ?

DUBOSQ

Hola ! Eun tam siuloc'h, Corret ! Me eo da vestr.
Bez sonj ama n'out ken kabiten digabestr,
Hag eur gir lavaret gant ma genou, ma den,
A ve awalch d'ez kas dustu d'ar grougaden.

AN TOUR D'AUVERGN

Malloz, na c'houi aze ? Lagardère, Kervelen,
Ar re a oa ganin gwech-all ofiserien,
C'houi ive e zo kouezet e renk an Dubosq-ma ?
Dindan dillad Saozon, me hoc'h adkav ama ?

KERVELEN

Hag e souezez, potr ! Me a gred eo leal
Esa tenna venjanz deuz an dud a Vro-C'hall
Pere o deuz laëret mad an Emigreed :
Eun deiz, ni antreo en Pariz distrujet !!

LAGARDÈRE

Hon zud kalz diouto a zo bet dibennet !

AN TOUR D'AUVERGN

Netra n'all iskuzi ho kundut d'eoc'h, paotred,
Mez c'houi Dubosq, c'houi oa gant ar Gonyansion
C'houi oa e-touez ar re a ziskaraz an Tron,
Perag oc'h-hu ama ? Ze na gomprenan ket.

DUBOSQ

Chom peuc'h eur pennadik, hag ec'h ez da gleved.
Pa 'moa bet da vleset en arme Pyrene,
Ma buez na oa ken asur 'barz an arme,
Hag a meuz kuitaet neuze ar rujumant.
Robespier a oa mestr var ar c'houarnamant,
Evid e sekretour en doa ma dibabet.
Mez siwaz evidomp, an traou na badchont ket.
D'e dro oa bet troc'het e benn da Robespier,
Hag ar bobl kounnaret ma c'hlaske dre ar Ger
Evid ma vijen bet ive gwillotinet.
Gallet a meuz kuzet, ha goude 'on tec'het
Ha laket ar mor don etre Pariz ha me.
En em angajet 'on ama 'barz an arme.
Forz zo piou zerviji mar be eur paë uhel ?
Me a zastum arc'hant ama gant ar rozèl.

AN TOUR D'AUVERGN

Arc'hant Judas !

DUBOSQ

Diwall, Corret, deuz da gomzou.
N'on ket himor da zouffr diganid rebechou,
Er c'hontrol, me a zeu, evel eur mignon d'id,
Deuz perz roue Bro-Saoz, evit lavaret d'id
Penez, mar 'gout kontant, ez po da librente.

LIZA

Ma Jezus, ar frankiz !

GWEGAN

Beza lipr, ma Doue.

AN TOUR D'AUVERGN

Te lavar e vin lipr mar 'meuz ar c'hoantegez,
Peseurt kondision ?

DUBOSQ

Chench a rouantelez,
Ha digemer eur garg en armeiou Bro-Saoz.

AN TOUR D'AUVERGN

Biken !

DUBOSQ

Jeneral vi.

AN TOUR D'AUVERGN

A drenv ! Toueller faoz !
Na c'houllan mui kleved eur gir diwar benn-ze.
Kentoc'h vit trahisa, me gollo ma bue.

DUBOSQ

Gwaz a ze evidout pa na asantez ket,
Meur a vlavez ama te chomo prizoniet.
Koulskoude, me c'hall c'hoaz dond a benn, ma-hunan,
Da rei d'id da frankiz evit tec'hel ac'hann.
Te zouaro en Franz 'n eur ober eun devez.
Eur gondision zo, hag houma a zo eaz.
Da c'hoar a garan kalz. M'hi goulenn en d'hoar,
Ha dustu me 'n em garg da zond d'ho sovetei...

AN TOUR D'AUVERGN

Liza a zo mestrez d'ei e-hunan pell zo.
Gouzout a ra petra he deuz d'ober hirio.

DUBOSQ

Dimezel, c'houi a glev. Roet ho kalon d'in
Ha doriou ar prizon vo digoret ganin.

LIZA

Gwall afrontet, Aotrou, ho kavan var an heur,
O tond da insulti ac'hanomp en drougeur.
Tec'hit, tec'hit ac'hann ! D'eoc'h eo ma bue
Mez ma c'halon, biken ne 'po diganin-me !

DUBOSQ

A zo mad.

(goapeüs ha fougeer)

Tour d'Auvergn, var da gask e welan
Eur gokarden driliou 'ma ket he flas aman.
Sklap ar gokarden-ze raktal divar da dro.

AN TOUR D'AUVERGN *(a denn e gokarden, hag
e gleze dustu goude. Pika ra ar gokarden en bek
ar c'hleze, hag e lavar.)*

Ma tostee brema, an neb hi c'hemero !

(Souza reont. A greiz-holl, eur c'hannad a erru)

KEVREN III

AN HEVELEP RE : AR C'HANNAD

AR C'HANNAD

En hano ar Roue, sed ama eul lizer.

(Rei a ra anezan da Dubosq)

DUBOSQ *(p'hen deuz lennet)*

Kollet 'on adarre ar wech-ma, mil tonner.

(D'an Tour d'Auvergn)

Tour d'Auvergn, lipr ec'h out, hag an daou all ive,
Troket oc'h bet ho tri, var asant ar Roue,
Deuz tri Saoz, prizonier en Franz eur pennad oa.

Sethu digor an nor. C'houi a c'hall partia.
Mez ni 'n em welo c'hoaz, Tour d'Auvergn, be sonj mad
Rag kasoni Dubosq a renk beuzi er gwad.

(An tri brizonier hag ar c'hannad a guita)

KEVREN IV

DUBOSQ ; KERVELEN ; LAGARDÈRE

DUBOSQ

Na fell ket d'in chom ken ama da louedi.
Varc'hoaz me a ielo da Vro Autrich-Hongri.
Etre Franz hag Autrich eo kroget ar brezel,
Me gombato deuz Franz, na pa ve red mervel,
Me a venjo varnhi deuz ma zo esaet
Ma c'has d'ar gwillotin da veza dic'houget...

An Tour d'Auvergn ive, hennez a fell d'in kaout :
Gant unan ac'hanomp e renko chom ar maout !

— (Rldoch) —

PEVARE ARVEST

An teatr a ziskuezo eur c'hamp, en Oberhausen, Bavièr, ar 27 a viz Even 1800. Arme ar Rhin, dindan renadur Moreau, eur Breizad deuz Montroulez, a zo lec'hiet eno, o c'hortoz an Autrichianed hag ar Brusianed. Eun neubeud Grenadourien deuz ar Penn-Gard a zo var an teatr.

KEVREN I

IAN, LOEIZ, GWILLOU, *grenadourien goz*

IAN

Allo, Loeiz, c'houez da dan.

LOEIZ

Evid ma vo gret koan.

GWILLOU

Evit ma vo tommet da c'hortoz an emgann.

IAN (*goude eur pennad*)

Tud lô?

LOEIZ ha GWILLOU

Na petra 'ta?

IAN

Gout a ret ar c'helo?

LOEIZ

Pesort kelou, kenvreur ?

IAN

Tour d'Auvergn zo distro.

LOEIZ ha GWILLOU

Tour d'Auvergn zo distro !

IAN

Evel-se a gonter.

LOEIZ

Mar 'deo gwir ze, paotred, e ia mad an afer.
Mez pelec'h ema 'ta ?

IAN

Erruet ez eo dec'h

Da zigas d'an arme ar sikour euz e vrec'h.
Hanvet eo kabiten var hon c'hompagnunez.

GWILLOU

A zo mad a-vat, paotr ! Na pebez levenez
A vezo en arme.

LOEIZ

Hon zad, hon mignon koz,

A zeu c'hoaz da-ved-omp goude pemp bloaz repoz !
Pebez chanz vad, paotred !

IAN

Hag ar viktorel bep tro !
Sell 'ta... Ha n'eo ket hen a zired var hon zro !
Gant tri pe bevar all ?

LOEIZ

Hen eo ! M'hen anave !

HOLL (*en eur hija o zokeier*)

Bebet an Tour d'Auvergn da viken en arme !

KEVREN II

AN HEVELEP RE ; AN TOUR D'AUVERGN ;
GRENADOURIEN IAOUANK

(*An tri Grenadour koz a gouez d'an daoulin
diragan hag a bok d'e zaouarn. An Tour d'Au-
vergn a zo kozet : 57 vloaz en deiz.*)

AN TOUR D'AUVERGN

Savet 'n ho sao, paotred. Na dleer daoulina
Nemed dirag Doue, perc'hen ha mestr peb tra.
Me n'on nemed eun den ! Ha c'hoaz, vel ma welet.
Ec'h on arru gwall fall ! Poan a meuz o kerzet.

IAN

Ni ho tougo neuze, pa n'ellfet mui balé !
Mez brema pa 'z oc'h c'hoaz distro kreiz an arme
N'hon dilezfet ken, han ?

AN TOUR D'AUVERGN

Me eo gret ma reuzad.

Me zo gret da vervel e-barz kreiz an argad.
Ma gwele a repoz a vo Park-ar-Brezel.

IAN

Ta, ta ! C'houi a welo adarre Breiz-Izel.

(Eur poz a reont)

Ar mintin a zo fresk. Tommet 'ta, kabiten,
Eur bannac'h tan a zo. Bremaik vo ar souben,
Ha ma keret tanva anei...

AN TOUR D'AUVERGN

Trugarekaat.

IAN *(o rei eur gamellad d'ezan)*

Sed. Kemeret houma. Reit eo a galon vad.

AN TOUR D'AUVERGN

Mez c'houi a dremeno...

IAN

Eun taol kaër, kabiten,
Ar blijadur d'ho kaout a zo koulz ha souben.

(An Tour d'Auvergn a zebr)

LOEIZ

Mar be ho polonte, kabiten, konta d'emp
Dre benoz an damped oc'h distroet ganemp.

AN TOUR D'AUVERGN

Tud kez, re hir a ve. Me grenno an histor.

Mar peuz sonj, pemp bloaz zo e oan et d'an Arvor
Gant Liza ha Gwegan, var eur vagik konverz.
Mez eul lestr a Vro-Saoz hon c'hemeraz dre nerz
Hag e oamp digaset prizonier da Blymouth.

LOEIZ

Da Blymouth ?

AN TOUR D'AUVERGN

Ia, tre di ! Ha ma fell d'eoc'h gouzout
Pere a oa laket d'am mesa er prizon
Kervelen oa unan, siwaz... hag eur Breton !
An eil oa Lagardère, o daou deuz an noblanz
Gant ar Revolution chaseet euz a Franz,
Hag an dried a oa... Dubosq !

HOLL

Ar galeour !

AN TOUR D'AUVERGN

... Laket gantan, etre Pariz hag hen, an dour,
Rag darbed oa d'ezan beza gwillotinet
Samblez gant Robespier. Pa oan dishualet,
Me zistroaz da chom da Bassy, tal Pariz,
En ti eur mignon koz, a zo deuz ma broiz,
Ar Brigant e hano.

IAN

Mez ne lavaret ket
Penoaz hoc'h euz sonjet dont mesk ar soudarded.

AN TOUR D'AUVERGN

Ma zonzj a oa 'velse.

EUR GRENADOUR (*Gwegan*)

Nan, nan, Grenadourien,
Re yodest eo hon mestr, re humbl hon c'habiten,
Me zisklerio peb tra. Brigant noa seiz bugel,
C'houec'h anezo oa bet dija 'barz ar brezel.
Vid ramplas ar seizved, hon mestr a galon vraz
A zo 'n em angajet ha deut d'an arme c'hoaz,
Hag hen koz ha toc'hor ! Lavaromp en eur vouez
Bevet an Tour d'Auvergn !

AN HOLL

Bevet an Tour d'Auvergn, da viken en hon touez.

KEVREN III

AN HEVELEP RE; EUR C'HANNAD *goloet a c'halonsou*

AR C'HANNAD *pehini a zoug eur paper hag
eur sabren alaouret*

En hano Bonapart, konsul kenta Bro-C'hall
M'ho salud, Tour d'Auvergn ha c'houi soudarded all.
(Holl a reont ar salud soudard)

Karget on, euz a berz Bonapart, hon Renner,
Da zoned d'ho pete, da lenn d'eoc'h eur paper.

(Lenn a ra)

— « Bonapart, Kenta Konsul ar Republik, var
ginnig Karnot, ministr ar brezel, a c'hourc'hemenn
penoz Difenner ar Vro, An Tour d'Auvergn Corret,

a zo hanvet Kenta Grenadour armeiou ar Republik.
Roet a vezo d'ezan eur sabren a enor. »

AR GRENADOURIEN

Iouc'hou ! Bravo ! Hourra !

(Trouz ha levenez)

AN TOUR D'AUVERGN

Aotrou Kannad, brasoc'h plijadur n'alle ket
Bonapart na Carnot ober d'in. Teurvezet
Koulskoude ma zilaou. Me revuz krak ha krenn
Beza hanvet *kenta* mesk ar Grenadourien.
Ni a zo henvel holl. Breudeur omp en arme,
Hini a-bed na dle sevel dreist egile.
Mez evid ar Sabren, m'hi c'hemero gant grad,
Hag a dacho d'ober ganthi eun impli vad.

*(Ar c'hannad a stag ar sabren endro da
ziougroazel an Tour d'Auvergn.)*

AR C'HANNAD

Kabiten Tour d'Auvergn, gouzout a ret penoz
Bonapart na c'hoarz ket. Hoc'h hano, a fenoze,
A vo merket 'velse var an holl baperou :
Kenta Grenadour oc'h e-barz an armeiou.

(Saludi a ra hag e kuita)

KEVREN IV

AN HEVELEP RE *nemed ar c'hannad*

AN TOUR D'AUVERGN

Ar C'henta Grenadour ! Pebez hano diez
Da zougen gant enor ! Braz eo ma levez
D'hen dougen en ho mesk. Mez hen zo ma setanz
Mervel a rin gantan en eur zifenn ar Franz.
Ia... me wel an ankou o toned d'an daoulam,
Mez ne ra ket aoun d'in ! Ar vuez zo eur sam
Evidon-me brema... Silaouet ! Silaouet !
Me a glev an tennou...

(Tennou fuzul er meaz)

An Autrichianed

A zo arru varnomp ! D'an armou !!

AR GRENADOURIEN

Hardi d'ê !

KEVREN V

*Autrichianed a zired, en o fenn Dubosq, ar
c'habiten trubard.*

AN HEVELEP RE ; DUBOSQ ; AUTRICHIANED

*Dubosq a weler oc'h ataki dustu an Tour d'Au-
vergn. Rei a ra d'ezan taol ar maro. An Tour
d'Auvergn a gouez var an douar. Ar Grenadourien
a lak an Enebourien da dec'hel kuit. Dubosq a zo
great prizonier ganto. Chadennet a ve.*

AN TOUR D'AUVERGN *(en eur vervel)*

Jezus ha Maria... Kemeret ma ene...

LOEIZ

Maro eo ! Maro eo ! O kriza planeden.

IAN

Kollet eo da viken hon zad, hon c'habiten,
Ha dre zaouarn Dubosq ! E wad a c'houll venjan.
Dubosq a renk mervel da baëa e ofanz.

(D'ar Grenadourien)

Bandet e zaoulagad, vel d'an torfetourien.
Karget ho fuzulioù dustu, Grenadourien.

*(Karga reont o fuzulioù, epad ma lak Loeiz
eul lian en dro da dal Dubosq.)*

DUBOSQ

Truez !!

IAN

Paz d'eun treitour ! Gra da beden vihan,
Rag do varo zo tost.

(D'ar Grenadourien)

Eun, daou, tri : Chod : Tan !

(Tennou a strak, Dubosq a gouez maro)

KEVREN VI

AR GRENADOURIEN

*Ar soudarded gall a zamm var o diskoaz korf-
maro an Tour d'Auvergn. Dond a reont gantan
var zu-araok al leuren-deatr, ha Ian a lavar :*

IAN

Korf eun den ken dispar ama vo interet,
Mez e vrud a chomo keid ma pado ar bed.
Hema zo bet eur Sant. Heuillomp holl e skueriou,
Gallaoued ha Breiziz, kerzomp var e roudou.

(Ar ridoch a ziskenn)

DIVEZ AR C'HOARI